

Digoradur : Kas a ra ar bedeladur get frankiz mont-dont evit ar marc'hadourezhioù hag ar c'hapitalioù kevezerezh etre an tiriadoù hag ar poblañsoù. Kreskiñ a ra an dizingalderioù sokial ha tiriadel.

Evit-se, daoustoc'h eo c'hoazh palioù an oberourien kempenn an tiriad bihanaat an dizingalderioù dirak ar lojeiz, an trañsportoù, ar servijoù publik. ? Ha daoustoc'h o deus an ostilhoù evit en ober?

I. Dalc'hoù(enjeux) kempenn an tiriad

Niverus-tre eo an dizingalderioù àr an tiriad gall hag o vrasaat get ar bedeladur hag ar meurgêriekadur.

- Bez ez eus rannvroioù kalon ekonomikel ar vro evel Pariz , kêr vedel nemeti eo e Frañs . Strolliñ a ra Ile-de-France 1/5vet pe 19% ag ar boblañs gall. Kreizenniñ a ra ivez 29% ag ar PDG gall hag ivez sezoù sokial an embregerezhioù treuzvroadedel.
- Ar rannvroioù evel ar Su pe ar C'hornôg a zesach obererezhioù eus ar vegenn, o tostaat d'an **arvorekaat** (ZIP, touristelezh, digreizenniñ an industriezh, teknopolennoù..) a zispleg nerzh rannvroioù ar C'hornôg hag ar C'hreisteiz. hag a ya
- Bez ez eus ar rannvroioù industriel kozh e Norzh hag e Reter get fraostoù industriel ha un diskar poblañs hag ivez an takadoù e-barzh diagonalenn an takadoù distank get ur boblañs é kozhaat ha an dilez douar-gounit
- Bez ez eus ivez karterioù loc'hus e-barzh kêrioù bras e-tal karterioù pobl o c'houzañv eus ar bedeladur.

II. Oberourien kempenn an tiriad gall:

Daoust e kresk an dizingalderioù e Frañs e vez ar Stad gall é klask bihanaat an dispignoù publik hag e vez muioc’h-mui é zigresk e gemer perzh e-barzh kempenn an tiriad.


Dre al lezennoù digreizennadur eus 1982 ha 2015, en deus ar Stad roet d’ar strollegezhioù tiriadel ar c’harg da arc’hantouriñ ha sevel raktresoù, da gentañ d’ar rannvroioù. Ar re-se a c’hell goulenn skoazelloù get an Unvaniezh Europa.

➤ **Ar strollegezhioù tiriadel:**

- rannvroioù : 13 rannvro+ 5 DROM rannvroioù tramor
- departamantoù: 101 e Frañs get 96 e Frañs metropolitan
- kumunoù: 35 000
- Unvaniezh Europat a arc’hant ar raktresoù (FEDER(= Fonds européen de développement régional)

Oc’h penn oberourien kempenn an tiriad zo dispartiet etre daou lojik , pe digresk an dizingalderioù àr an tiriad pe kreñvaat efedsuted ha kreñvder ar meurgêrioù er rannvroioù a-benn sachiñ c’hoazh muioc’h a obererezhioù ha postadurioù (investissements).

Ar Stad a labour a-gevred get ar rannvroioù evit krouiñ poloù kevezusted er meurgerioù bras ar pezh a greizenn muioc’h c’hoazh an obererezhioù hag ar pinvidigezhioù.



III. An obererezhioù hag ar raktresoù evit kempenn an tiriad gall: ar raktresoù lakaet e-pleustr abaoe un nebeut blezadoù o deus daou bal , digresk an dizingalderioù àr an tiriadhag ivez kreñvaat efedsuted ha kreñvder ar meurgêrioù er rannvroioù a-benn sachiñ c'hoazh muioc'h a obererezhioù ha postadurioù(investissements).

Pal al Louvre e Lens eo krouiñ labour e-barzh an domani touristelezh e-barzh ur rannvro get ur feur dilabour uhel , krouiñ an ZRR (zonennoù adnerzhiñ àr ar maez) eo kinnig sikourioù d'an takadoù àr ar maez hag o-unan evit adnerzhiñ anezheget ur pal strategel diazezet àr ar c'hengred etre an tiriadoù

Politikerezh evit aznerzhiñ(revitaliser) an takadoù àr ar maez > ZRR zones de revitalisation rurale (= takadoù distank = takadoù

get ur stankter ar boblañs izel da lâret eo edan 30 annezad dre km² hervez an INSEE= 15 579 kumun e Frañs evit 6,5% ag ar boblañs).

Ar pal eo bihanaat digresk ekonomikel ha demografel an tiriadoù-mañ. Evit-se e vez krouet **Tiez servijoù foran(publik)** evit respont da ezhommoù ar geodediz pell ag ar servijoù publik. (e 2015= 364)

Met, en tu all an daou skouer evel krouidigezh an LGV evit liammiñ ar meurgêrioù etreze al lonk tost tout ar budjed arc'hant eus an trañsportoù publik, pe ar skouer all evel krouidigezh ar poloù kevezusted zo kentoc'h evit kreñvaat avantajoù ar meurgêrioù rannvroel Ha dilezel an takadoù tro-dro, en anv an efedusted ekonomikel.



➤ **Ret eo ar raktresoù kas àr –raok an diorren padus:**

é toujiñ doc’h an ekonomiezh(krouiñ pinvidigezhioù evit gwelaat doareoù beviñ an dud), an endro(gwareziñ ar bevliesseurt hag an danvezioù naturel hag energetek) hag ar gevredigezh (tizhout ezhommoù an dud àr dachenn ar Yec’hed, deskadurezh, annez, labour....)



Klozadur : kempenn an tiriad eo diazezet àr an ingalded etre an tiriadoù hag ivez pal pennañ eo bihanaat an dizingalderioù etre an annezidi. **Bec’h implij ez zeus** muioc’h-mui etre annezidi a gav raktresoù nann-pouezus ha ne zoujant ket doc’h an diorren padus hag an oberourien ekonomikel a gav gwelloc’h kas àr-raok efedusted o tiriad.